

War don: O filii et filiae.

Sonjomp ervat, holl dud ar bed,

Doue 'zo galloudak meurbet:

'Vel a laro pep tra ' vo graet...Meulomp Doue!

Meulomp Doue, meulomp Doue! Gloar da Zoue!

Doue 'zo bepret eun Tad mat

A glask hon savetei dalc'h-mat,

Met ni 'zo bugale divat...Gwalleur d'imp-ni!

Gwalleur, gwalleur da bep-hini! Gwalleur d'imp-ni!

'Boue pell-zo ar Groaz vinniget

Gant kalz a dud 'oa disprizet,

Eus lec'hiou a enor stlapet..Gwalleur d'imp-ni!

Gwalleur, gwalleur da bep-hini! Gwalleur d'imp-ni!

Er fin, dorn Doue 'zo deuet!

Hag ar poblou 'zo kastizet,

Pep tra dre-oll 'zo dismantret...Gwalen gast!

Gwalen, gwalen da bep-hini! Gwalen gast!

Kemeromp holl kalon bepred!

Doue 'gar ar bobl unvanet:

Pa zeuy an eur, 'vimp diboaniet...Meulomp Doue.